

CHANSON NEVE

Ton : Tostait oll tud yaouanc, tostait da glevet.

Pa em bens cavet matier e tenan da implija
An nebeut speret am bens evit allout rima,
Eur gaouennic neve var boës an dud yaouanc
A velou o n'em heuti bars an amzer brezant.

Eire an oll e cavan daou e particulier,
Hep dont da zoug va bec da lavaret gweyer,
En em gar en onestis ha gant fideite,
Hac a vo sur unisset met o sud a hersife.

Mes allas en amzer-ma, vel m'er gouzer erfad
Ne estimer mui an dud mar n'o defe yalc'had ;
Eur yalc'had queit a va brec'h eur rent a hempant scoët
Mar ho peuz tout an draze c'houi ho po ho souët.

Bet e zeus bet ena amzer, mes breman ne m'an mui,
Ar re goz ho deus goët hac ho dens contet din,
Ne glasquet nemet tud renquet dre e c'homportamant,
Ha breman n'e zeler mui nemet eus an arc'hant.

Pe c'hui vo den a feçon, pe c'hui ne viet quet,
N'ho po netra da zouja mar o peuz dec mil scoët ;
Goulenit hac ho pezo an hini ho po c'hoant,
Na n'eus quet a zar boudou vit potret an arc'hant.

Me am bezz bet remerquet ha goëtlet ran ato
Pa ve quision d'ober demezion em bro,
E zeo potret an arc'hant eo a c'honneur bepzet,
Lee h ar re all ne gavont met h euch col da choquet.

Estonnet on gouzoude e tonet da gompren,
E zeuz quement a strach evit m'ou don mouden ;
Rac gulet a ramp bendez tud o vonet d'ar be
Ne ya met eur gos lincer hac eun archet gante.

En despet da guement-se a vo cavet bepzet
Cals a dalou ha mamou hep scrupul ebet,
O ampich ho bugale da guemeret ho c'hoant,
Evit quemer eur parti enep ho zantimant.

Me meus gouët va unan dre va experianç
Na n'ezz quet c'hoas pel amzer ma poursuen ma chanç ;
An avaristet alies laca ampichamant
Hac ar separation entre an dud yaouanc.

M'em boa choazet da vestrez eur plac'h honest meurbed
Pehini garen sur ia dreist an oll merc'hed,
Hac e halou lavaret ha men eus assuri,
E oa quer fidel din-me, evel ma voan dezi.

Bet ezomp eur pennad o n'em zarempredi
Epad eur blaves pe zaou marteze memes tri,
Hac hor boa credet parfet evizemp unisset
Mes en creës hon esperanç ezomp bet surprenet.

Epad hon antretien e palantemp bepzet,
Eus an opposition a elfemp da gaonet,
Evezz abeurz hon c'herent balamour d'hon danve,
Rac allas ! ar yalc'h scanva a oa eus va c'hoste.

Hac ar pez hor boe sonjet a zo bet arruet,
A ben eur pennad goude e zeo bet prononçet
An arret a zisparti etrezomp-ni hon daou,
Collet hor beus hon amzer hac uzet hor boutaou.

Pa oamp-ni en em gavet en eun tn a goste
Eur vech en particulier hi lavaras din-me,
An daëlou n'e daoulagad, he monez entrecoupet :
Allas ! e mui va mignon, ni a vo separet.

Eun den zo deut d'am goulen hac en deus fors arc'hant
Me a renquo en quemer ha n'am be quet a c'hoant,
Me zo c'hoas merc'h minores n'a meus met naontec vloa
Non quet mestrez ma hunan, ret eo obciissa.

Mes c'honi tadon ha mamou, perac e exercet
E quever ho pugale eur pouoar difennet ?
Na noc'h quet quen ignorant quement na ouifoc'h quet
Ar pez a raer evelse zo eur has reservet.

Rac ar Providanç divin e deveus destinet
He chanç da bep cronadur pa ze deut var ar bed ;
Ha c'hui tad, mam dinatur, c'hui ho c'heus ta chonjet
E commandot d'an hini en deveus ho cronet.

Ho pugale zo deza muyoc'h eguet deoc'hu
Ha pa rezistit outa alies e arvu,
E velit ho pugale en eur vrassa mizer,
Daoust d'ar bernou arc'hant a deus en o syer.

Ia gulet ramp exemplou dirac hon daou lagad,
Bugale o rei o maloz d'o mam conlz a d'o zad,
Dre n'o deus o c'hontreignet hep aon da gaont pec'hed,
Da rei o dorn deou d'ar re ne oant quet de gleet.

Clevit comzou eun den fur o parlant evelse.
Eun demezi mad a gret dre volonte Done,
Zo eur barados terrestr, mes an hini ve gret
Dre an arc'hant, zo lies eun ifern anticipet.

Perac c'hoas tad dinatur, ha c'hui mam obstinet,
E forcit ho pugale da zont da guemeret,
Tud hac a rei o malheur er bed tre ma vent-y
Hac a vezo siouas ! caus dezo d'en em zaonni.

C'hui vir eus ho pugale da guemeret ho c'hoant
Evit dont da dimezi me lavar d'an arc'hant,
O dorn o deveus roët mes o c'halon n'o deus quet,
Ha birviquen plijadur n'o do mui var ar bed.

Nequet vidon va hunan a laran quement-ma,
Rac me zo etablisset eun tamig so dja,
Hac ar plac'h em beus hentet zo ive dimezet
Graç dei da veva eurus atao gant e fried.

An hini zo he fried oc'h pen m'en deus danve,
En deus c'hoas peb avantach var va fersonach-me ;
Coals a gorf hac a speret evel a galite,
Me a meus eur joa vras eus an eil hac eguile.

Me a meus cavet ive unan d'am fantazi
Ha pa meus hi c'hemeret ne c'hulennan netra mui ;
Eguet c'hi rentan eürus ha m'ar gallan ober,
Me a gavo agreabl ar rest eus va amzer.

Mes c'hui oll botret yaouanc pa n'och dimezet c'hoas
Eun avis a ran deoc'h pa zeot d'ober ho choas,
Sellit atao en ho reng ha non pas uelloc'h
Gant aon da dapad lamou hac a ve noazus deoc'h.

Arabat eo da nicun eus an dud pinvidic
Dont de n'em facha ouzi dre ma meus eun tamig
Parlartet var sujet gant re a liberte,
Mar em beus ho offanset mie c'houl iscus oute.

Ne lavaran mui netra rae aoualc'h a meus laret
Ha martese goude me a vo repehet ;
Mes brema e c'hansavan quent evit finissa
Ne aller devan eürus hep eun tam peadra.

Mes pa sellan eus ar bed a cals a dud enni
N'all quet beza partajet entre daou n'a tre tri,
Me sonch din dam santimant gant eun neubeut danve
E aller besa quen eürus hac en ep o deus re.

Me a sobet reprenet gant enn den a speret,
Gousout mat ran e hano ma mie c'hoant d'er laret,
Pa seblanten caout dispris evit madou ar bed,
M'am bize bet cals danve, bigeso dissipet.

En despet da guement-se ne allan quet level
Me a zo eun den farçus ha na c'houlennan guel,
Vit lacat lod da visqua ha lod all da c'hoarziu,
Mar ne n'oun quet pinvidic me vo atao badin.

Eur vech eo falet d'in c'hoas e n'em zivertissa
O tout d'en em amusi gant traouigou netra,
Evit ar vech diveza car ne rin mui quen,
Adieu d'ar yaouanquis ! ô brillanta fleuren !!!

Me garfe retorn brema var an amzer passeet,
Vit n'em zisposi guelloc'h en hini da zonet ;
Mes allas va migaoned, n'ac an eil n'ac eben
An hini a ve ed coz ne ail yaouanequat quen.

Mes c'hui, tudigou yaouanc, pa o peuz an amzer,
Considerit eun neubeut ha c'hui a velo scler,
Pebes chenchamant a zeu goude an dimezi
An tourmant hac ar glac'har an hirvoud an annui.

Mar em beus c'hoas eun aviz deoc'h mignoned
Eo ma teufot da zional mar em oc'h c'hoaz abred,

Ne vo o calon charmet dre er fauss amitie
Ha heuliot va c'hentell c'hui vo furoc'h a ze.

Rac ar merc'hed yaouanc-se a so tromplus meu bed
Ne ziscont met an tu mad, an tu fal vo cuzet,
Me lavar eur plac'h yaouanc a zo evel eur rosen,
Pehini en dimezi a chanche en eur spernen.

Mes dre ma zeus eur panchant hac a c'honez an oll
Nep a gombat eus Venus zo sur aoualc'h da goll,
Nep zo ganti amarret n'all mui en em souten,
N'eus casi den cre aoualc'h vit tori e chaden.

Achui a ran va chanson, aman e lacan fin,
Brenan pa sellan outi me a gav trist he min
Dre ne deo quet brao goisquet ne fell quet deü monet
Eus an eil ty d'eguile gant aoun na ve goapet.

Mes me meus sonjet ober vel eun tad a famill,
P'ini en de ar malheur da gaouet eur verc'h vil
He derc'hel ra en e c'hamb' hep hi c'hinig da zen
Evit e rei d'ar c'henta a zeüo d'e goulen.

Ar zon-ma a zo henvel eus nep en hi gret
Pehini vel ma oar cals n'en deus quet a c'hened ;
N'a quen neubeut cals speret mes farçus eo a gaë,
Mar fell deoc'h gout e hano c'hui er c'hleo hep dale.


E hano evel m'er skriv, zo Renan Olier,
Zo guinidic hac a chom e barz parez Scaër ;
En eur doma en tal an tan dre eun nosvez goan yen
En deus savet ar zon-mà tre e goan hac e leign.

Allas ar paour quez den ma a zo c'hoas glac'haret
Gant ar c'heuz d'e yaouanquis p'ini en deus colet ;
Hi eo ar gaëra loden eus a vuez an den
Pehini siouas ! a basse evel eur luyaden.

Pa dosteomp quer buan eus an eternite
Disprizomp madou ar bed ha servijomp Doue
Eus ar peuz hor buuz ama ne zai netra guenomp,
Ha d'ar maro peb unan a rento eun e gont.

Ha peira bennac ma zon dent d'ober ar son-ma
Evit en em amusi dre ma caran cans,
Me oar e zeo guelloc'h din ha deoc'h, oll dadou,
Instrui hor bugale evit canan somiou.

Ar reflexionou man a zeu da chench ma monez,
C'hui oll quement em c'hlevo bezit touchet ivez,
Ha pa ne maomp er bed-man vit chom enni bepret
Graç deomp-oll d'en em velet bars ker ar joaustet.



Moulet gant AR GOFFIC, en Lanhuon.